

Uzulier bras.

An uzulier vras deus a pontegern
 A zo gred e gadeur en ivern

An uzulier braz deus a Pontegern
 A verq ar bara gant eun noten.

bis – Ag an aman gant eur reunen
 bis – da viret na roffe d'ar paour an alusen.

Pa za an uzulier d an illis
 a chach ar paour var he c'houris

Ag en ho houlen ken truezus
 eun dinerik balamour da Jesus.

na me na meus nag arc'hant nag aour
 na diner ebed da reï d'ar paour.

Mevelliou an uzulier a lavare
 D'an uzulier bras eun dei's a voë :

Mar karforc'h reï d'ar paour an allusen
 Ni tremenfe bemdez eb or meren.

– la do koan c'hwi a ve ingrad
 A drepte diou pe teïr skudellad
 – e kof al levrini e raffen vad.

Mab ena an uzulier a lavare
 D'an uzulier vras eun dei's a voë :

– Poent eo dorna ar berniou ed
 Ar beoïen a rank kaout o boued

– Me ne zournin ked va berniou ed
 Ken a dei' seiz skoët poeselad ed.

Ken a dai' seïz skoët peb boëzellad
 Mam mezo bioc'h lez gant beb sac'hat

**Ne kredan ked ve naonegez vras
Pa na feur ar beorien ar ied glas**

**Pa (bis)...
A dibri ar pri melen var an enhou bras**

**An uzulier bras a lavare
Na de vevelou eun dei's a we :**

**– na pelec'h e man va mab hena
Da klasq eul lisser dam liena.**

**– Aze zo eur valin ebars ar saneil (1)
A zo bed nao blos o holo lin.**

**– Ounez a zo mad da liana
Dro da uzulierez er bed man.**

**Kant a pa vijent kontet
Na voant ket evid sevel an archet.**

**Klask ar gelvizien a voa ranket
Nag evid digeri an archet**

**Na pa voa digoret an archet
E voa ebars evel eur barbet.**

**A kement e goële prezant
voa ebars evel eun aërouant.**

**Pa za an uzulier dan douar
E c'huiban ar skour a zioc'h ar char**

**Ag a lavar dre ma c'huiban
An uzulier bras a zo en tan**

**Pa za an usulier er veret
A krene ar groas viniget.**

Catou bouder de Plouenan, 22 sept. 1852.

(1) *Rien au 163 recto. De même aux 164 et 165 rectos.*

(2) *D'abord : saneil ; l'e a été corrigé en : a.*